

Sant Diboan

(Ton : Bosenn Elliant).

DISKAN

*Sant Diboan, o Patron karet,
En hor poaniou hon zikouret,
Goulennet 'vidomp gant Doue
Yec'hed ar c'hory hag an ene.*

I

Ho kalloud war beo ha maro
Zo brudet e peor c'horn ar vro,
Pell 'zo, e chapel Sant-Zulien,
An neb ho ped a gav zouten.

II

Nag a dud gant ar boan gwasket
Zo gwelet amañ daoulinet,
Hag o tistrei büan d'ar gêr,
O c'halon dijäl ha seder.

III

Pegement 'zo nijet etrus
'Trezek tron alaouret Jezuz,
Rak m'o doa en o zremenvan
'N em erbedet ouz sant Diboan.

IV

D'ar bed, pa larimp kenavo,
Pa zigouêo eur hor maro,
Evit ma rimp eur maro mat,
Deit da jerri hon daoulagad.

V


Sant Diboan, mignon bras Doue,
Ouz hon anaon ho pêt true,
Kaset genoc'h d'an eurusted
Hor c'herent hag hor mignoned.

VI

O c'hory zo du-ze er vered,
Lod eus o c'hreziou d'eoc'h gloestret,
Ra iei o ene hebdale
D'an Nefvou da veuli Doue.

VII

Dirazoc'h, gant eur feiz gwirion,
Laret a reomp a-greiz kalon :
Hon renet holl, yaouank ha koz,
War binojenn ar Baradoz.



Kantig Sant Nikolas

(Tón : *Kelven.*)

DISKAN

*Sant Nikolaş benniget, chilaouet hor pedenn,
Taolet eur zell a druez war ho pardonerien;
Laket en o c'halonou karantez 'vit Jezuz
Ar Mestr ho peus prezeget gant eur feiz ken nerzus.*

I

O klevet ar burzudou greit genoc'h e pep bro,
Tudchentil vras Lanvolen — Trancher oa o hano —
Savas ar chapel gaer-mañ evit ho enori,
Hag hon tud-koz zirede a bep tu d'ho pedi.

II

Ho kerent oa pinvidik ha gant an holl meulet,
Ouzoc'h pep tra vousec'hoarze kentiz ma oac'h ganet,
Met ho kalon entanet gant karantez Doue
A chomas bepred distag diouz enor ha danve.

III

Savetei an eneou ha plijout da Zoue,
Setu ar pezh a glaskec'h epad holl ho puhe;
Paouroc'h evit an dud-kêz digenoc'h zikouret,
War roudou ho Mestr zantel, bepred ho peus kerzet.

IV

Plijet genoc'h, sant Patron, skwilh ho kwellan bennoz
War hon labouriou poanius, war douar hon tud-koz;
Benniget bras ha bihan, hag e pep tiagez,
Miret bepred, ni ho ped, an eurz vat, ar furnez.

V

Satan a glask en hor bro pellat ar vugale
Diouz o Mestr hag o C'hrouer 'vit gonit o ene,
Evel epad ho puhez, harpet yaouank ha koz
'Vit ma kerzint bepred eon war hent ar Baradoz.

VI

Evel gwechall hon Tadou, ni fell d'imp kenderc'hel
Da zont amañ d'ho pedi, da c'houlenn ho skoazell;
Benniget parrez Gourin, greit ma chomo bepred
E penn an holl barreziou e-lec'h oc'h enoret.

Mat da veza moulllet

*Guened, 10 a viz Gouere 1933,
A. GUILLEVIC, Vik. Vras.*